



Ar reudeurig

Fichenn savet gant Silvenn Koant

Evit piv?

Adalek ar RG en ur sal vras pe er maez

Talvoudegezh ar c'hoari

- mestroniañ ar c'horf
- Bezañ aketus

Pal ar c'hoari

Sentiñ ouzh aroueziadennoù roet gant ar penn-c'hoarier

Azetet kemener eo ar c'hoarierien, war ur ront

Skipailhoù a zo dre an istor a vez kontet : da skouer evit istor ur redeurig un nebeud c'hoarierien zo ar rodoù, un nebeud all ar blenier, re all ar c'hezeg, ar veajourien, ar malizennoù, hag all

Rener ar c'hoari a gont an istor en ur lavarout anvioù ar skipailhoù dibabet.

Neuze, bep wech pa vo klevet un anv e vo da vezañ jestraouet gant bugale ar skipailh. da skouer :

evit ar ger « redeurig » ar c'hoarierien a sav, a dro warno hag a azez en-dro

evit ar ger « rodoù » ar c'hoarierien a sav hag a ra trouz ar rodoù

evit ar ger « blenier » sevel hag ober stlakadenn ar skourjez

evit ar ger « marc'h » pe « kezeg » sevel hag ober daoulamm ha gourrizierezh ar marc'h.

... hag all

Mont pelloc'h gant ar c'hoari

tu `zo d'ober gant forzh peseurt istor, unan gant loened da skouer ha lakaat anezho da jestraouiñ pe d'ober trouz al loen anvet, pe c'hoazh gant ar micherioù jestraouiñ ar pezh a vez graet, d'ar re all da lavarout peseurt micher eo, e brezhoneg, eveljust.